

« MAZHEAS AR C'HIGER »

Ur pezh-c'hoari fentus ha farsus gant Strollad Kallag :

1429. C'hoant en deus Mazheas, ha heñv kiger, da vont da chevalier, ar pezh n'eo ket aezet pa n'eo ket gwall nec'het an dud all gant se...

Un istor marc'heien deus ar Grennamzer eo, met n'it ket da soñjal evit afer-se e vo diskouezet ur gentel istor deoc'h : marc'heien dirollet doare BD pe Monty Python int, disheñvel-tre neuze diouzh ar re a vez studiet er skolioù.

Troet eo bet ar pezh-mañ gant Sylvain Botrel ha Marie-Hélène Morvan diwar *Histoire de Maheu le Boucher* gant Eduardo Manet, ur skrivagner bet ganet e Cuba hag a zo pell zo o vevañ e Bro-C'hall. Priziet e oa bet *Maheu le Boucher* e Festival Avignon e 1986.

Kalz a blijadur zo da-heul ar pezh-mañ, nerzh ha startijenn gant an aktourien, brezhoneg yac'h ha saourus gante.

Degemeret mat eo gant an holl, bras ha bihan, kozh ha yaouank. C'hoariet eo bet meur a wech déjà : Roazhon, Pondivi, Lopereg, Langoned, Gwengamp, An Oriant, Alre, Karaez, Ploufragan, Benac'h, Kallag hag an trowardroioù, ha bezañ 'vo c'hoazh e Pleuzal, Tremargad, Kerglof...

Ar sellerien na ouzont ket trawalc'h a vrezhoneg a vez roet dezhe un tamm diverrañ deus ar pezh e galleg.

Padañ a ra 1 eur 30.

Ha ne vez ket kavet hir an amzer !